

PROGRAMM AR RUMMAD «BALE HA KAOZEAL»

Pal ar rummad « Bale ha kaozeal »

D'ar re n'o deus ket c'hoant da chom azezet evit heuliañ kentelioù, e vo kinniget dezhe mont er-maez eus al lise evit ober baleadennoù tro-dro da Gastellin.

Kinniget eo dreist-holl d'ar re a zo bet meur a wech e KEAV hag o deus graet kalz a rummadoù dija. Ne vo ket graet nemet bale avat. Pal kentañ ar rummad-mañ zo lakaat an dud da gaozeal. Pourmen a vo da gentañ tout un digarez evit kaozeal brezhoneg.bemdez ; a-raok mont kuit e vo graet un displegadenn verr war dachenn an distagadur. A-hed an devezh e klasko pep hini lakaat e pleustr ar pezh a vo bet desket diouzh ar mintin.

Etre 9 ha 13 km a vo kerzhet bemdez hag er rummad-se e vo **12 stajiad d'ar muiañ.**

Petra a vo graet ?

- Ur valeadenn bemdez, nemet d'an deiz e vefe graet unan all gant an holl stajidi. D'an devezh a vez kaozeet gant brezhonegerien ar vro e vo kerzhet diouzh ar mintin nemetken.
- Bemdez a-raok mont kuit e vo graet un displegadenn verr (9^e- 9^{e45}) diwar - benn an distagadur, war ur poent resis : an taol-mouezh, ar vogalennoù berr hag ar re hir, ar vogalennoù dre fri.... E-pad ar valeadenn e vo graet c'hoarioù, evezhiadennoù diwar-benn danvez an deiz.
- Baleadennoù eus 10e betek 4.30^e eur goude kreisteiz. Gant ur piknik. War-dro 10-13 km. Da skouer : a-hed ar ganol, tro-dro d' ar Menez C'homm, war roudoù Jakez Riou e Lotei, koad ar C'hrannou... nebeutoc'h eget 15 mn bleniañ bewech.
- Displegadennoù a vo graet a-hed ar valeadenn diwar-benn an istor, diwar-benn an douaroniezh, diwar-benn traoù a-vremañ, mojennoù, ha kement 'zo.
- Ma vo glav e vo klasket mont e mirdioù, en ilizoù kentoc'h... Met ne raio ket glav !
- Essylt Louarn ha Herve Saliou a raio war-dro ar rummad-mañ.

Evit kemer perzh

- Digor d'an holl re a zo **en o aes e brezhoneg** ha tud gouest da gerzhet 4 eurvezh d'ar muiañ.
- Dont gant botoù bale, dilhad evit ar glav (kenkaz...), ur sac'h-kein da lakaat dour hag ar piknik.
- Ar re o deus ur c'harr-tan a vo degemeret mat-tre... Met ar re all ivez !

EVEZHIADENN : Ar stajidi o devo lakaet o anv er rummad “Bale ha kaozeal” a zisklêr **bezañ gouest da chom er rummad-se betek fin ar sizhun.**

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.